

LEORIK
BREURIEZ
ar Mammou kristen

GANT EUR MISSIONER BREIZAD



KEMPER

TI GOAZIOU — TI GUIVARCH

fb
237

Bov

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

beza sikouret en he labour gant eur C'honsail Mammou kristen, evel ma vez great e Breuriez Bugale Mari.

IV. — Ar pezh zo d'ober evit mont er Vreuriez.

An hini he deuz c'hoant da veza digemeret er Vreuriez a dle goulenn digant ar belek-rener. Ganthan e vezo lakeat he hano (hag hini he c'hear) var gaïer ar Vreuriez, ha diganthen e resevo dre skrid eun testeni ez eo bet digemeret etouez ar Mammou kristen. An testenize sinet gant ar Rener, a c'hell beza skrivet var eur paper distag, pe guelloc'h c'hoaz var al *Leorik* a vezo etre daouarn pep hini, adalek ma vezo resevet.

V. — Ar madou spirituel a gaver er Vreuriez.

Ar Mammou kristen a gav er Vreuriez madou eleiz evit ho ene.

1^o Ennhi e kavont da genta *muïoc'h à sklerijen* evit anaout petra c'houlen Doue digantho en ho stad. Ar prezegennoù a glevont hag a zo great express-mad evitho a ra dezho digeri guelloc'h ho daoulagad ha beza bepred var evez. Gullet a reont skleroc'h ho deveriou e kenver holl dud ho zi : ho frijeou, ho bugale hag ho zervicherien. A hent all e teskont ive guelloc'h petra ho deuz d'ober evit lakât ar vuez kristen da vont bepred var vellât er barrez.

2^o Ar Vreuriez a zo c'hoaz evit ar Mammou kristen *eur zoursen a nerz*. Ho deveriou a zo braz, hag aliez ive ar c'hroasioù ho deuz da zougen a vez goal bounner. Ezom ho deuz eta da veza kennerzet muïoc'h c'hoaz eget an dud all. Ar Vreuriez a zikour anezho da gaout muïoc'h a nerz-kaloun. Ennhi e teu dezho skoazel digant ar Verc'hez, ar Zent hag ar Zentezed a bedont bemdez evit ho bugale hag evitho ho-unan.

Kennerzet e vezont ouzpenn dre ar pedennoù great e kominun da bep reunion. Eno e peder bevech evit

holl intansionou ar Mammou kristen, ha dreist holl an intansionou a vez bet merket gantho araok ar reunion.

Perz ho deuz c'hoaz e pedennoù an eneoù mad a zo er memez breuriez gantho hag a zo skignet dre bevar c'horn ar bed.

3^o Ouzpenn-ze, bep daou vloaz da nebeuta, e poanier da rei dezho *eur retred*, epad tri pe bevar dervez. Ha setu adarre eur c'hrass talvouduz ; an holl a c'hoar n'euz ket par d'ar retrejou evit lakât bennoz an Aotrou Doue da zisken puill var an eneoù ha da nevezi ennho ar vuez kristen.

4^o Da ziveza, ar Mammou kristen a gav er Vreuriez *Induljansou kaer* kinniget dezho da c'hounit pe evitho ho-unan, pe evit an Anaoun.

D'ar gouelioù merket aman varlerc'h e c'hounezont eun Induljanz plenier, var bouez mont da govez ha da gommunia, ober eur vizit d'an iliz pe d'ar chapel m'eo savet ennhi ar Vreuriez, ha pedi eno en intansionou Hon Tad Santel ar Pab.

TAOLEN AR GOUELIOU

D'ar 6 a viz Genver : ar Rouaned.
D'an eil a viz C'huevrer : Gouel ar Chandelour.
D'an 19 a viz Meurz : Sant Jozeph.
D'ar guener varlerc'h sul ar Bassion : Seiz Glac'har ar Verc'hez.
D'ar 4 a viz Mae : Santez Monika.
D'an 21 a viz Even : Sant Loïz Gonzag.
D'ar 26 a viz Gouere : Santez Anna.
D'an 28 a viz Eost : Sant Aogustin.
D'an trede sul a viz Guengolo : Seiz Glac'har an Itron Varia.
D'an eil a viz Here : An Elez Gardian.
D'an 8 a viz Du : Eisved gouel an Holl Zent.
D'an 8 a viz Kerzu : Gouel Konseption dinam ar Verc'hez.

(Pa n'hell ket ar Mammou kristen kaout perz en eur reunion da genver ar gouelioù-ze, an Induljanz plenier a c'hell beza gounezet gantho eun deiz all benak epad an eisved.)

VI. — Ar pezh zo d'ober,
evit kaout perzh e madou spirituel ar Vreuriezh.

Evit kaout perzh er madou-ze, kalz talvoudusoc'h eget holl vadou ar bed-man, ar Mammou kristen a dle lakât ho bolontez vad da heuilla penn da benn Reolen ar Vreuriezh, merket er bajen-seitek.

EIL PENNAD

PEDENNOU

I. — PEDEN DA LAVARET BEMDEZ

O Mari, Guerc'hez dinam ha Mamm a c'hlaç'har, erbedit hor bugale ger ouz Kaloun Zakr ho Mab Jezuz, ne reus netra d'he Vamm; pedit evitho. Elez gardian, pedit evitho. Sant Jozeph, patrour gallouduz, pedit evitho. Sant Yann, dikibl maia-karet Kaloun Jezus, pedit evitho. Santez Anna, Mamm ar Verc'hez Vari, pedit evitho. Sant Aogustin, pedit evitho. Sant Loiz Gonzag, pedit evitho. Santez Monika, pedit evitho hag evidomp. Evelse-bezet-great.

II. — PEDENNOU ALL

1. Peden ar Mammou kristen evit ho familh.

O va Doue, grit ma savo, betek trôn ho krassou, ar pedennou great gant ar Mammou kristen, unanet gant Kaloun Mari, Mamm an holl mammou. Ra zeuio ar pedennou-ze d'ober d'hor bugale kaout ar quir furnez, tenzor an devosion, gant kement a zell ouz brassa mad ho ene hag ho c'horf. Dre nerz ar memez pedennou, ra zeuio hon holl gerent da anaout mad Hor Zalver Jezuz-Krist, d'he garet fidel, d'he zervicha e peb amzer, da gerzet var hent ar zilvidigez eternal, o poania da blijout deoc'h, Ra vezint, o va Doue, sikouret ganeoc'h, karget

ganeoc'h a c'hrassou; ra vezo ho buez leun a veritou, evit-ma vezo skrivet ho hanoioù, e kichen hor re-ni, var al Leor a vuez. Evelse-bezet-great.

2. Peden da Zantez Monika.

O va Doue, c'houi ho peuz digemeret dezirou ha daelou Santez Monika; selaouet ho peuz he fedennou betek konvertisa he mab, ha quelloc'h c'hoaz: betek ober anezhan eur zant brudet braz; plijet ganeoc'h ive selaou ac'hanomp gant ar memez madelez, evit ma c'hellimp evelldhi, lakât hor bugale da zavetei ho eneoù ha santellât hor buez hon-unan, dre Jezuz-Krist hon Aotrou. Evelse-bezet-great.

3. Peden ar Mammou kristen, evit konsakri ho bugale da Zone.

Salver Jezuz, o pet sonj petra reac'h, epad ma vevac'h etouez an dud hag a vel dezho. C'houi en em blij e tis-kouez ar vrasa karantez d'ar vugale, a deue ho mammou da ginnig deoc'h gant kement a brez hag a fizianz. Ho taouarn divin a roe dezho merkou a garantez tener, ha lavaret a reac'h d'hoc'h Ebestel: « List ar vugaligoù da zont davedoun, rag dezho eo rouantelezh an Ee ».

O Jezuz, o pet ar vadelez da deuler eur zell var va zud; ho c'hinnig hag ho c'honsakri a ran deoc'h. Roit ho pennoz dezho, me ho ped; troit ho c'halonou varzu ar vertuzioù kristen; grit dezho beza fidel d'an Iliz ha derc'hel, betek fin ho buez, da gerzet var hent ho kourc'hemennou.

O Mari, Mamm da Jezuz, bezit Mamm va bugale: bezit patrounez ha difennourez va familh. Evelse-bezet-great.

4. Ar « Memorare », en honor d'ar Verc'hez.

O pet sonj, Guerc'hez Vari-mourbed santel, n'euz bet klevet biskoaz e ve bet dilezet unan benak euz ar re ho

deuz klasket ho skoazel, goulennet ho sikour hag en em erbedet ouzoc'h. Me ive, gant ar memez fizianz, a zired davedoc'h, Guerc'hez ar guerc'hezed, o va Mamm ; dont a ran d'ho kaout, ha stoui a ran dirazoc'h, en eur hirvoudi dindan beac'h va fec'hejou. Na zisprijit ket va fedennou, o Mamm Doue va Zalver, mes selaouit anezho gant madelez ha roit d'in va goulenn.

(300 dervez Indulj. bevech. — Indulj. plenier, eur vech ar miz, d'ar c'hondisionou ordinal, gant hen lavaret bemdez.)

TREDE PENNAD

KANTIKOU

1. Kantik ar Mammou kristen.

Var don : Ni ho salud, Rouanez an Elez.

Guerc'hez santel ha Mamm leun a c'hlac'har,
Dre ho poaniou var lein Menez Kalvar,
Pedit ho Mab da rei d'hor famillou
Peoc'h er bed-man, eurusted an Envou.

DISKAN :

*O Guerc'hez sakr, ha c'houi Sent hag Elez,
Omp aketuz da henori bemdez,
Plijet ganeoc'h goulenn bennoz Doue
D'hor priejou, deomp-ni, d'hor bugale.*

O Elez mad, a zo, e pep mare,
Karget da jom vardro hor bugale,
Gant ho skoazel grit ma vezint miret
D'hor peot peot drouk, dreist holl diouz ar pec'hed.

O Sant Joseph, hor patrour gallouduz,
Fizianz hon euz en ho peden nerzuz ;
Hor famillou a zo deoc'h konsakret ;
Biken ganeoc'h ne vezint dilezet.

Aotrou Sant Yann, diskibl mil guech euz,
A repozas var Galoun Zakr Jezuz,
Plijet goulenn ma vezo 'n he Galoun
Hano hon tud da viken skrivet doun.

Santez Anna, mamm garet ar Verc'hez,
Ouz ar mammou sellit gant madelez.
Hor zikourit da ren hor bugale,
Ha d'ho henchha bepred varzu an Ee.

Sant Aogustin, ennoc'h e velomp splamm
Talvoudegez peden ha skouer eur vamm.
Gant ho sikour, ra vimp, hed hor buez,
D'hor bugale eur skouer a zantelez.

Sant Loiz Gonzag, choazet gant an Iliz
Evel patrour ha skouer ar yaouankiz,
Digant Doue goulennit, ni ho ped,
D'hor bugale chom pur ha fur bepred.

Pa vimp er boan, o Santez Monika,
Pedit Doue da zont d'hor c'hennerza.
Ho pezit sonj euz ar re a garomp ;
Pedit 'vitho ha pedit evidomp.

2. Kantik en henor da Zantez Anna.

Var don : D'hor Mamm Santez Anna.

DISKAN :

*Itron Santez Anna,
Selaouit ar beden
A ra deoc'h, en deiz-ma,
An holl mammou kristen.*

E kalon peb Breizad
Doun e kaver skrivet
Hano dous ar Vamm vad
A gar ar Vretoned.

Gant hon tadou eo bet
Henoret a bell zo ;
D'he henori bepred
Ni ive a zalc'ho.

Ganthi eo bet ganet
Ar Verc'hez Mamm Doue ;
Ha, dre-ze, eo savet
D'eur renk huel en Ee.

He galloud a zo braz,
He madelez ive ;
Ne zisprijas biskoaz
Peden he bugale.

Soudarded, moraerien,
Araok mont euz ar ger,
Diganthi a c'houlén
Ho diwall en danjer.

Ar vamm gristen he fed
Evit he bugale,
Ma vint fidel bepred
Da heuill lezen Doue.

Dalc'hmad ar Vretoned,
En ho foaniou brassa,
A zavas ho spered
Varzu Santez Anna.

Hirio zo ezom braz
Da c'houlén he skoazel,
Rag a bep tu, siouaz !
Ne veler met brezel.

Er barrez, ni ho ped,
Lakit peoc'h, union ;
Kreskit ennhî bepred
Ar gwir devosion.

Itron Santez Anna,
Hon mirit deiz ha noz,
Ha dalc'hit d'hon henchâ
Varzu ar baradoz.

PEVARE PENNAD

KENTELIOU D'AR MAMMOU KRISTEN

I

Unan euz brassa deveriou eur vamm gristen eo poania da zevel he bugale e doujanz Doue. Ouz al labour-ze eo red mad soursial abred. D'an oad m'ema c'hoaz he c'hrouadur var he barlen, ar vamm a dle koumans dija da lakât dezhan plegou kristen en he galoun. Ene eur bugel, eme Sant Bazil, a zo goag evel eun tamm koar hag e c'heller rei dezhan ar furm a garer.

Mammou kristen, kerkent ha ma c'hell ho pugale koumpren eun draik benak, poanit dioc'htu da zila en ho spered traou mad ha santel. Komzit dezho aliez euz ar Mabik Jezuz hag he Vamm benniget ; deskit dezho ema lagad Doue o para varnho e peb leac'h, hag ez euz noz deiz en ho c'hichen eun eal euz ar baradoz.

Labourit ouzpenn da sklerijenna ha da ehuna ho c'houstianz.

Boazit anezho da gassât kement a zisplij da Zoue. Diouallit koulzkoude da lakât dezho traou faoz en ho fenn. Rak-se, var digarez kreski ennhô an horrol ouz peb drouk, ne dleit morse lavaret dezho ez euz pec'hejou marvel, eleac'h n'euz ket.

Enebit ive abred ouz an defaotou a velit o tivoana ennhô. An drouk-louzou zo kalz essoc'h da zisplanta, pa ne vez ket c'hoaz eat doun ho grizioù. Eur blantennik zo essoc'h da blega ha da ehuna eget eur vezen. Sonjit ervad !

II

Hervez lezen ar Juzevien guechall, ar gragez ho doa bet eur c'hrouadur a ranke mont da dempl Jerusalem, evit beza purifiet. N'oa great al lezen-ze nemet evit ar mammou ordinal ; n'euz forz, ar Verc'hez Vari, dre humilite, a c'hoanteas ober evel ar mammou all.

Er parrezioù kristen, e veler ar mammou o kemeret skouer diouz ar Verc'hez. Kenta guech ma teuont d'an iliz, goude m'ho deuz bet eur bugel, ne vankont morse da lakât benniga ho fenn. Guir eo n'eo ket eun dra merket dindan boan a bec'hed, mes, hervéz kelennadurez an Iliz, ez eo « eur c'hiz devot ha dign da veza meulet ». Arabad eo eta ez affe da goll. Dre ar pedennou great gant ar belek, ar vamm a vez sikouret da drugarekât an Aotrou Doue euz he dilivranz hag euz an holl grassou he deuz bet digant he vadelez.

Ar Verc'hez, pa ias d'an templ, a ginnigas he Mab da Zoue. Ar mammou kristen a dle ober evel dhi. Kinnig he pugale da Zoue, araok zoken ma vezont ganet, evel ma rea Santez Monika. Kinnig anezho dreist holl, d'ar momet kén dous m'ho digasser deoc'h euz an iliz, pa zint nevez-badezet. En eur starda ho krouadurik va boull ho kaloun, lavarit neuze : O va Doue, ar bugel-ma zo deoc'h-hu muioc'h eget d'in-me. Digemerit anezhan, me ho ped. Her c'hinnig a ran deoc'h gant feiz, gant fizianz ha karantez. Ra vezo deoc'h da viken !

Mall e vez ive gant eur vamm gristen kinnig he bugale d'ar Verc'hez, evit lakât anezho guelloc'h dindan he skoazel gallouduz.

III

Lavaret a rear n'euz ket par d'ar vamm evit sevel mad eur bugel. Peurlieasa eo guir, mes, herio an deiz koulzkoude, eleiz a vammou n'en em gemeront ket a zoare gant al labour-ze.

Darn anezho ne boaniont tamm da zeski d'ho bugale anaout

ha karet Doue. A hent all, ne ouzont ho c'helen hag ho c'horrija nemet dre goler, ha en eur leuskel varnho bep seurt komzou divalo.

Mammou all, er c'hontrol, a zo re laosk. Diez e kavont, emezho, kontrolia ho bugale ha lakât anezho da vouela. Var eun hevelep digarez, e lezont ho bugale da veza dizuj ha dired, heb n'ho deffe kouraj avoalc'h d'o c'horrija ; ne c'houlzanvont ket zoken e vefent korrijet gant re all. Ar mammou-ze zo dall ha diskiant ; ne glaskont, siouaz dezho ! na guir vad ho bugale nag hini ho famill. Ar vugale a lezer d'ober ho fenn ho-unan a denn ato kalz a drubiill var ho c'herent.

Etouez ar mammou a ra ho dever gant bolontez vad, meur a hini a zeu aviziou da zigourachi, abalamour ne velont ket dioc'htu frouez ar boan a gomeront gant ho bugale. Arabad eo dezho koulzskoude beza souezet. Pa vezer o c'houennat, n'e ket en eun taol e ve dilastezet eun tamm douar. Pa vez hadet, n'e ket en eun dervez na daou e teu an had da zivoana ha da rei eun cost pinvidik. Amzer ive zo red evit disc'hrizienna an defaotou ha lakât ar vertuzioù da greski. Er poent-se, grit eta kement a zo en ho kalloud, ha, da c'houde, gortozit gant pasianted.

Diouallit, ouzpenn, da zerc'hel ennoc'h hoc'h-unan an techou a rebecht d'ho pugale. Anez e chomo dinerz ho kenteliou kaera. Ho pugale ne raint van ebet euz ho komzou hag a heuillo kentoc'h ho skoueriu. Lakit eta dirag ho daoulagad eur vuez direbech e peb doare.

IV

Pa ieas ar Verc'hez d'an templ, an den zantel Simeon a zisklerias dezhi e vije treuzet he c'haloun gant eur c'hleze a c'hla-char. Dont a reas he gomzou da vir. Divar neuze dreist holl, ar Verc'hez a gavas en he buez muioc'h a boan eget a levenez.

Poan, anken ha trubiillou a bep seurt, setu ive peurliessa steuen buez an holl mammou. Ho foaniou, evit dezho beza skanv e skoaz re ar Verc'hez, a zo koulzskoude goal bounner aviziou. Dindan ar zamm-ze, eur vamm gristen a anavez mad he dever. Ne fell ket dezhi koll mirit he foaniou, hag eleac'h krosmolat enep Doue ha tamall he broyidanz, ne baouez da lavaret dezhan gant Hor Zalver : « Ra vezo great ho polontez, ha n'e ket va hini ». Ha, dre ar beden, e teu dezhi nerz da zougen he c'hroaz.

Ezom braz he deuz ar vamm da veza kennerzet, dreist holl pa zeu ar maro kriz da lemel diganthi eur bugel yaouankik c'hoaz. He c'haloun baour zo rannet ; he daoulagad a skuill daelou c'houero ; mes he feiz a deu d'he c'honforti. Sonjal a rama he c'hrouadur etouez eledigou ar baradoz, euruz eno da viken, ha diouallet evit mad diouz pep danjer da vont da goll. Sonjal a ra, ouzpenn, pegen talvouduz ha pegen nerzuz e vezo pedennou an Elik evit tenna bennoz an Aotrou Doue varnhi ha var he famill.

V

Eur vamm gristen a dle beza kuzulierez he bugale. A dra zur, arabad eo e ve dalc'hmad o sarmoun dezho, rag anez, heb dale, ne rafent van a netra, mes ho c'helen aliez a zo eun dra red koulzskoude.

An dud yaouank, o veza ma vank dezho skiant-prenet, ho deuz ezom da veza bleinet, kasset dre an dourn koulz-lavaret. Gant piou e vezint ? Evel just, gant ho mamm, rag he c'henteliou a gavo guelloc'h digemer euz ho ferz.

Eur vamm gristen a boagn da viret ne ve touellet he bugale gant ar vanite, an ebatou, ha lavariou faoz ar bed. Aketuz eo, a hent all, da bellât anezho diouz ar goal gompagnuneziou, ha ne c'houlzanv ket e vefent divezad o tont d'ar gear euz an eureujou, ar pardonieu, etc...

Pa zeu evitho ar mare da choaz eur stad a vuez, ar vamm gristen a ra endra c'hell, evit ma vezint er plass hag er stad a fell da Zoue. Gouzout mad a ra eo eno hebken e kavint ar peoc'h hag an eurusted. Setu perag e poulz anezho da bedi en intanssion-ze, hag hi he-unan a bed assamblez gantho.

VI

Pa vel eur vamm gristen sklear avoalc'h eo galvet he bugale d'ar stad a briedelez, e rank kelen anezho da choaz hervez Doue, o lakât ar vertuzioù araog an danvez, hag ar furnez araog ar goanteri. Diouall a ra da renka an traoù dioc'h he zont he-unan, heb gullet mad hag hen e plij an daou zen yaouank an eil d'egile. Anez, penaoz e vefent euruz assamblez ?

Marteze lod euz he bugale vo galvet da jom dizemez, e kreiz ar bed. P'ho deuz great ho zont ha pa gavont guelloc'h chom en doare-ze, evit entent essoc'h ha parfetc'h euz ho zilvidigez

ha silvidigez an nessa, n'euz ket da rebech dezho. Arabad lakât anezho da vont, evel dre forz, er stad a briedelez.

Etouez an dud, eur rummad zo galvet da renons a grenn d'ar bed, evit en em gonsakri da Zoue. Eun henor braz a ra Doue d'eur vamm, pa c'houlén diganthi unan euz he mibien evit beza belek, relijiuz, pe unan euz he merc'hed evit mont d'ar gouent. Dirag daoulagad ar feiz n'euz netra kaeroc'h eget sevel eur bugel evit Doue hebken. Eur vech anavezet mad bolontez Doue, arabad enebi, rag hen eo kenta mestr ho pugale.

Mar kavit goal galet an disparti, sonjit petra ho deuz great ar Zent, ha bezit kourachuz evelldho. An diouer ho pezo gouzanvet a dalvezo deoc'h grassou puill ha talvouduz epad ho puez, hag eur joa vraz da heur ho maro.

VII

Pa rankas ar Verc'hez tec'het d'an Ejipt, he c'haloun a oue glac'haret braz. Nag a drubuillou er pennad-se euz he buez ! Morse koulzskoude ne oue guelec o fallgalouni. Sonjal a rea dalc'hamad ez oa o veilla varnhi eun tad holl-c'hallouduz hag holl-vadelezuz. E guirionez, morse Doue ne zilez ar re a laka ho fizianz ennhan.

Santimanchou ar Verc'hez a dle beza bepred e kaloun ar priejou. Ar Verc'hez a zesk dezho diouall da veza nec'het re gant an amzer da zont. A dra zur, eleac'h ma zeuz eun tiad bugale, e vezo poaniussoc'h ar vuez evit ar gerent, dreist holl evit ar vamm ; mes, a hent all, brassoc'h miritou e c'hounezint, ha kaeroc'h rekoumpans e kavint er baradoz.

Ar priejou a zalc'h da vev hervez Doue en ho stad a danva eur guir eurusted, rag en ho c'haloun e ren ar peoc'h. Dishenvel avad eo stad ar priejou ne vironet ket etrezho al lezennou santel great evitho gant an Aotrou Doue. Ar remorz a grign ho c'haloun a vir outho da veza euruz. Kaer a zo, ne c'hounezur ket o tirenka an urz great ha merket gant Doue he-unan.

E meur a vro, siouaz ! e veler, bep bloaz, niver ar vugale o vont var ziskar. Kementse a zo eur merk anet ez euz eno dizurziou eleiz, ha dizurziou ar seurt a laka malloz an Aotrou Doue da goueza var ar famillou hag ar broiou a bez. Nag a bec'hejou nebeutoc'h, ma vije brassoc'h, e kaloun ar priejou, ar fizianz e providanz Doue !

VIII

Ar mammou kristen ho deuz da zoursial ouz buez ho bugale araok zoken ma vezont lakeat gantho er bed. Ar gragez brazez a dle diouall mad diouz al labouriou-re stard, ar beac'hiou re bouner, etc...

Eur vech ganet ar bugel, arabad eo dale da gass anezhan da vadezi. (Ar gerent lezirek avoalc'h evit dale en tu all da zek dervez a rafe eur pec'hed marvel.)

Evit ar vugale a zigouez pell araok ho amzer (n'euz forz pegen pell araok), ez euz da deuler evez mad. Eleac'h ma zeuz eun tamm buez benag, ez euz eun ene ; ha dre-ze eo red e ve roet ar vadiziant, guella ma c'heller.

Evit eur c'hrouadur yaouankik, e ranker ive diouall mad ne ve lakeat e danjer da veza mouget. (Unan euz ar mammou a roas tro da varnedigez ken brudet ar roue Salomon he doa mouget he bugel dre he c'houk.)

Divezatoc'h, pa vez he bugale en oad da vont d'ar skol, eur vamm gristen a dle ober guella ma c'hell, evit kass anezho d'eur skol eleac'h ma teskint ho relijion assamblez gant an traou all. Ar gerent ho deffe eur rezoun grevuz da lakât ho bugale en eur skol neutr ne c'helfent hen ober koulzskoude nemet var bouez ober daou dra, merket dezho dindan boan a bec'hed :

Da genta, beilla mad var ar skol, evit gouzout hag hen e vez lennet pe lavaret eno eun dra bennak kountrol d'ar c'hredennou kristen. Ma vez great, n'euz ket da varc'hata. « Ar gerent, eme Leon XIII, a dle miret a-grenn ne zaffe ho bugale d'ar skolioù eleac'h ma ve danjer da lounka poezoun kredennou difeiz. »

An eil dever striz eo heman ; ar gerent (p'e guir ne zesker er skol neutr na pedennou na katekiz) a rank ho-unan deski dezho, pe fiziout anezho e tud all goest d'hen ober en ho flass.

Pa zigouez, evit ar baotred, mare ar zervij, kaloun eur vamm gristen a vez ankeniet. An holl a c'hoar pegen danjeruz eo an amzer-ze evit eneo an dud yaouank. Evit ma c'hellint en em viret guelloc'h, kassit anezho da retred ar zoudarded ; dalc'hit da erbedi anezho ouz ar Galoun Zakr, Itrou Varia an Armeou, Sant Mikel ha Santez Jeann d'Ark ; grit dezho skriva billiji, da verka e fell dezho, ma kousesfent klanv, kaout ar belek var ho zro. (An doare da skriva er billiji-ze a zeskint er retred pe gant beleien ar barrez.)

IX

Eur vamm gristen a entent ouz kement a c'hell miret ha kreski buez ar c'hass e kaloun he bugale. Aketuz eo da zeski dezho ho fedennou, da lakât anezho da bedi mintin ha noz, d'ho c'hass d'an ofissou gant eul leor oferen pe eur chapeled.

Pa vezo eur bugel en oad da vont da govez, he vamm a zesko dezhan klask he bec'hejou, kaout eur guir geuz dezho, ha mont heb aoun da gaout ar belek, a zo, evel Jezuz, mignoun ar vugale.

Hor Zalver hag an Ilis a c'houlenn ma zeuio ar vugale da gommunia abred hag alies, evit beza guir vugale kristen. Setu perak ar vamm a boanio d'ho lakât e stad d'hen ober, hag a zesko an hent dezho, en eur gommunia alies he-unan.

Evit derc'hel ha krenvât ar vuez kristen en ho familhou, ho peuz c'hoaz eur voyen talvouduz meurbed : dalc'hit da lavaret ar pedennou e kommun, da viana diouz an noz. En doare-ze, ar pedennou a vezo great aketussoc'h, hag, a hent all, talvoudusoc'h e vezint dirag Doue. Evel hon tadou a bell zo, dalc'hit ive da lenn Buez ar Zent.

Ouzpenn Buez ar Zent, eo mad kaout ive eun nebeut leoriou all, dreist holl ar re a zikour da anaout ha da garet muioc'h ar relijion. Ar skridou fall (leoriou, soniou, kazetennou), grit, en han' Doue, ne gavint morse digemer en ho ti. C'houez an ifern a zo gantho.

X

Gragez kristen, evit beva hervez Doue en ho stad, e rankit beza fidel d'ho teveriou e kenver ho priejou.

Da genta, ho tever eo senti. Hervez an urz merket gant Doue, ar goaz eo a zo e penn ar familh ; he volonteze a dle eta beza heuliet, nemet kountrol e ve da lezennou Doue ha d'ar goustianz.

Da heul ar zentidigez, resped ive ha karantez. Beillit mad var ho teod, rag ma teu ganeoc'h komzou diresped e kenver ho pried, ouzpenn ma savo tabud, e root skouer fall d'ho pugale. En em garit etrezoc'h a vir galoun ; gouzanvit an eil defaoutou egile, ha, ma sav avizioù eun tamm koummoul benak etrezoc'h, a vezo skubet buhan dre ar beden hag ar volonteze vad.

Evit diskouez d'ho pried eur guir garantez, poanit da ober

vad d'he ene. Roit dezhan kenteliou mad gant dousder ha resped ; pedit evithan ; konsolit anezhan en he boaniou.

Ar gragez kristen ho deuz ive deveriou e kenver ho zud kaer. Karantez, resped, dousder ha pasianted, setu ar peb brassa. Ho tever eo en em zieze, evit tremen outho hag ober plijadur dezho. Bez' euz, ouzpenn, da ziuall diouz an avi, eun tech milliget penn kaoz avizioù da galz a drubuill er familhou.

Pa zeuz er familh eun tamm danvez benak, hag e vez hano d'ober dilez, lod euz ar gerent a zo diaviz. En eur ziskregi a grenn euz kement ho deuz, e reont eun dra goal zanjeruz ; peurlieusa ho deuz keuz da c'houde, mes re zivezad.

XI

Etouez ar zentezed henoret gant an Iliz, e veler eun niver braz a intanvezed. Ho skouer a ziskouez d'ar merc'hed kristen e c'hellont hag e tleont santellât ho eneou, p'en em gavont er memez stad.

Eur vech eat ho pried da anaoun, dalc'hit da bedi bemdez evit repoz he ene ; hag a hent all, mar gellit, lakit pedi evithan. Abalamour deoc'h marteze, hen deuz, er Purgator, kaletoc'h hag hirroc'h pinijen da ober. O pet truez outhan hag ouzpenn kemerit truez ouz ho kerent all, a c'helfe beza er memez leac'h a boaniou. Grit ive d'ho pugale kaout sonj euz ho zad en ho fedennou pemdeziek.

N'ankounac'hait ket ken nebeut an Anaoun abandonnet.

P'e guir n'euz ken nemedoc'h evit gouarn ho familh, ho teveriou e kenver ar re ho peuz da velet varnho a zo strisoc'h eget biskoaz. Holl afferiou ar familh a zo etre ho taouarn ; renit anezho gant furnez. Ma ne da ket ato an traou dioù uz ho c'hoant, na zigourachit morse. Red eo neuze pedi devotoc'h, labourat startoc'h, ha kaout muioc'h a fizianz e Providanz an Aotrou Doue. An intanvezed, eur vech savet ho bugale, ho deuz peurlieusa muioc'h a frankiz eget an dud all evit en em rei d'an oberiou a zevesion hag a drugarez. Implijit mad ar frankiz-se, evit ren eur vuez bepred santelloc'h dirag Doue hag an dud. Evit beva santel, en ho stad, beillit mad var ho kaloun, diouallit d'en em lakât pe da jomd breiz ho faot e kreiz an okasionoù danjeruz.



XII

Ar gragez kristen, darn anezho da viana, ho deuz servicherien dindan ho galloud. Arabad eo ankounac'hât an deveriou en ho c'henver. An deveriou-ze a zo, tostik da vad, evel ar re ho deuz an tad hag ar vamm e kenver ho bugale. Eur vestrez kristen a zigor frank he daoulagad, evit beilla var gomportamant he holl zervicherien. Poania 'ra, e peb doare, da zerc'hel bepred urz vad en he zi, ha da bellât kement a c'hell beza noazuz d'an eneo. Morse, var digarez ebet, ne lakaio he zervicherien da derri lezen ar vijel ; morse ne vezo kaoz dezho da lavaret komzou fall, ha, ma lavaront, e poanio da viret outho.

Pa zigouez gant ho servicherien fazia en eul labour benak, kelennit anezho, ha, ma vez red, komzit ferm. Arabad koulz-koude beza re rust en ho c'henver ; ar c'homzou rok ha c'houero ne dalvezont netra.

Sonjit ho deuz ho servicherien eun ene da zavetei, koulz ha c'houi hoc'h unan. Sikourit anezho eta, dre ho skoueriou hag ho kenteliou mad, da ren eur vuez kristen e peb doare. Evel-doc'h int bugale da Zoue, ha galvet int evel-doc'h da vont eun deiz d'ar baradoz, hag eno zoken e c'helfent kaout eur renk huelloc'h eged hoc'h hini. Karit anezho hervez Doue, bezit mad outho, ha dalc'hit da rei dezho ar pezh ho deuz guir da gaout.

TAOLEN

	Pajen
1. Kelennadurez divar benn ar Vreuriez.....	1
2. Pedennou ar Mammou kristen.....	4
3. Kantikou : Kantik ar Mammou kristen.....	6
— Kantik da Zantez Anna.....	7
4. Kenteliou d'ar Mammou kristen.....	8

Quimper, Imprimerie Cornouaillaise.

REOLEN AR VREURIEZ

ARTIKL KENTA. Ober *eur gommunion bep miz* evit holl intansionou ar Vreuriez. Pa n'heller ket mont da gommunia, e ranker da viana, er memez intansionou, klevet an oferen hag ober ar gommunion a-galoun.

EIL ARTIKL. *Mont* an aketussa ma c'heller *d'ar reunionou*, a vez great eur vech ar miz da nebeuta. (Pa c'heller, e vez ive reunion d'an deiziou ma zeuz enno Induljanz plenier da c'hounit.) Ar belek-rener a verk da be zulvez e tle beza reunion pe reunionou ar miz.

TREDE ARTIKL. *Lavaret* bemdez *ar bedennik « O Mari, Guerc'hez dinam, etc. »* en honor d'ar Verc'hez ha da Zent patrouned ar Vreuriez. Ar beden-ze a gaver er bajen 4. Mad eo gouzout anezhi dindan evor.

PEVARE ARTIKL. Poania da *heuill ar Retred* prezeget dezho bep daou vloaz da nebeuta (1).

(1) Ar Mammou kristen a ro eun aluzen bennak, evit herzel ouz an dispignou a vez d'ober, dreist holl pa vez retred.

Imprimatur :

Quimper, le 4 Janvier 1927.

A. GADON,
Vic. gén.